

Gwerz koz

Sant Koneri

gant eur skeuden euz ar re gaera



GWERZ KOZ SANT KONERI

DISKAN

*Sant Koneri, sant evuruz,
Ouz mouez Doue bepred sentuz,
Pedet ma virfomp e lezen
Ha ma refomp gwir binijen.*

Roue ar zent, Salver ar bed,
Roet d'in-me gras ha spered
Da zisklerian da bep-hini
Bue 'n Otro Sant Koneri.

Laret a ra da beb-unan :
Mado an douar nan int man,
Avel ha moged, netra ken,
Pa ne badont ket da viken.

Avel ha moged, treo ar bed,
Gras Doue a-vad nan e ket :
Gant-gras Doue er c'halono,
E tizer alc'houe an Nenvo.

Lezen Doue eo red miret
Pe ve ezet, pe ne ve ket,
Hag en han' Doue pardoni
D'ar re a deu d'hon enebi.

En Breiz-Veur ar Zant binniget
A oe ganed ha beleget :
Izelek (1) hag hen disket braz,
Furoc'h 'vitan ne valeaz.

Furaat bemde a venne
Ha kas d'ar peñn lezen Doue :
E vado d'ar paour a roaz,
Skanvoc'h en hent mad e redaz.

Gant Tual, en e vanati,
E oa manac'h Sant Koneri,
En amzer ma teuaz eun ael
Da weled an abad santel.

— « Sav prim, Tual, a laraz-han,
Eman ar mor braz da dreizan ;
Da Vreiz-Izel eo red monet,
Pa zo gant Doue lavaret.

Kenkent Sant Tual a zentaz,
Ha gant Koneri a deuaz,
Gant Koneri ha kalz ouspen,
Ouspen tri-ugent 'n eur vander.

Kâd a rejont a-berz Doue
Eul lestri hag a c'hortoe ;
War douar Arvor o dougaz
Ha kenkent en ear e teuzaz (1).

Piou oufe rei da intenti
Pe zantelez oa e hini ?...
Doue a gare da gentan,
Ha, goude, 'kare e nesan.

Gant e beden e oa dalc'h-mad,
Dalc'h-mad beteg o labourat,
Fur ha glan a galon bepred,
Rag gant Doue oa e spered.

(1) Da laret eo « e fontaz ».

(1) Da laret eo « izel a galon. »

E gorf santel a gastie,
War an douar noaz e kouske,
'N evoa 'met bara ha-dour yen,
Kemend ha bevan, netra ken.

E skouer vad hag e bedénno
'Oa e gaeran prezegenno ;
Hep dale oa burzud gwelet
Ar vro da Zoue goneet.

Eun dijentil a oa er vro,
Eun den, Alwanduz e hano ;
O tont eun de eus ar chase,
E saludaz an den Doue.

Ar zant a lare e beden,
Neuze na dôle ple ouz den,
Eun dra vad hag a lakeaz
An otro en eur gonnar vraz.

— « Piou, emean, an azen-ze
Ken rog ha pa vije roue ?
N'em zalud ket p'hen zaludan !...
Me a deuy a-benn anean. »


E zenechal a oa gantan
Ha kenkent e laraz d'ean :
— « An den-ze zo beleg santel
Aman deued a-ziabel :

Aboue ma 'z ê arri er vro
En deuz gret kalz a vurzudo ;
Evit an holl e ped Doue,
Na baouez tamm na noz na de. » —

Ar c'homjo mad-man ne oant ked
Evid dousaat e spêred :
Lavaret a rez da daou den
Kerc'hat ar Zant en e lojen.

An daou-man oa goue 'vel loened :
Distrei a rejont en eur red ;
Ha da zailhat war ar Zant kêz,
Evel bleidi war eun heiez.

Skei a rejont an den Doue,
Skei a rejont ken didrue
Ma torjont daou eus e gosto :
Ar Zant a oa hanter-varo.



An den Ior'chuz, Alvanduz ha sant Koneri.

Ar zenechal a arriaz ;
Re diweat e oa, ziouaz !
— « Paouezet, 'mean, ho tollo !
Paouezet 'ta, pe me 'welo. » —

An den-man, evel eun den mad,
An daero war e zaoulagad,
A dosta d'ar zant gant true,
Rag gwall-boanius 'oa e zoare.

Ar zant, war e zaoulin savet,
'Lere leun a evurusted :
— « Ma foanio, Jezuz, ma Doue,
Ma foanio nan int man d'ho re.

Er C'halvar ouz ho kroaz staget,
D'ar pec'her hoc'h euz pardonet,
Pardon, ive d'am bourevien !
Pardon, pardon ha sklérijen ! » —

Kenkent, pebez tra vuzuduz !
Stad an daou den a oe spontuz :
O fenn war o chouk kildroet
Hag i o-dabu mezevennet.

Evel barr delio e krenent ;
Na welent tamm, na dic'houezent ;
Ne oant ket 'vit finval kammet...
Gwalen Doue na c'hoari ket !

Ar zenechal, braz e estlamm,
A yez war varc'h, d'ar pewar-lamm,
Da digemen da Alvanduz,
Eun dra a oa ken burzuduz.

An otro, 'dalek ma klevaz,
Da lojen ar zant a redaz,
Hag hen d'an daoulin da bedi,
Ma teurveje o fardoni...

Sant Koneri ouz o gwelet
War o daoulin ken glac'haret,
A gavaz tu da brezek d'e
Ar gwir fe ha doujanz Doue.

Goude bean o c'helennet,
E tigasaz d'e ar yec'hed,
Yec'hed ar c'horf d'e a roaz,
Ha hini 'n ine gwelloc'h c'hoaz.

An otro 'bedaz Koneri
Da dont gantan da chom 'n e di.
— « Deut ganin, emean, otro,
Ha d'ac'h me 'rey ma holl vado. » —

Ar zant a lavaraz d'ean :
— « Et d'ho ti ; me a chom aman ;
Losket em euz ma holl vado,
'Vit bevan paour e-maez ma bro. » —

E berr amzer e oe brudet,
Ar burzud neve c'hoarveet :
Tro-dro ne oa gant pep-hini
Nemet kelo a Goneri.

A bep tu 'teuer d'hen kavet :
An dud klanv a glask ar yec'het,
Ar re-all nerz ha sklerijen
Da vevan 'vel gwir gristenien.

Eur wech ar Zant a oa pedet
Da laret eun ofern euret,
Rag ar priejo 'devoa fe
Da bedenno an den Doue.

Dont a rez eta Koneri ;
Ar men a oa d'oferenni,
Ar men-oter n'an evoa ken
Nemet eur pilier d'hen souten.

Pa oad en-kreiz an oferen,
Parfed an holl gant o feden,
An droug-spered, ennan drouk braz,
Ar men dre 'n hanter a doraz.

Evitan da vean toret,
Ar men-oter ne finvaz ket :
Sant Koneri a oa eno,
Trec'h e bedenn d'an diaoulo.

Ar Zant avad a c'hoantae,
Bean e unan gant Doue ;
C'hoant an oa da guz ouz pep den
E vue hag e binijen.

Rak-ze gant Doue kuzuilhet,
E tilezaz koajo Gwened,
Da Blouvouskan, en bro-Dreger,
E teuaz da zevel e ger.

Eno, kouls hag en Bro-Wened,
Kalz a dud kez an deuz tennet,
An deuz tennet da gâd Doue,
O tiski d'eze ar wir fe.

En enor d'an Dreinded santel,
E savaz eno eur chapel ;
Ha, goude kalz a vurzudo,
Ec'h ez ac'hane d'an Nenvo.

En e chapel eman bepred
E benn, e divrec'h binniget,
Ha gante kalz a relego :
Eun tensor kaer meurbed d'ar vro.

Ar bobl gristen, diwech er bla,
A dired di da bardona,
Sur peb-unan deuz e vennad,
Pa bed Koneri gant fe vad.

Pedet e ve ouz pep klenved,
Kenkouls a gorf 'vel a spered,
Ouz an derzien hag ar pec'hed,
Gwasan klenved a zo er bed.

Da gâd Koneri ar moraer,
Gwall-nec'het dindan gwall-amzer,
A gas kalonek e beden,
Ha sant Koneri hen zouten.

Kemeromp skouer war ar sant-man :
Tec'homp deuz ar bed eveltan,
Karomp Doue 'vel m'en deuz gret ;
Eno 'man an evurusted.

Sant binniget, Sant Koneri,
Reit e vennad da bep-hini :
Gras Doue a c'houlomp kentan
Ha treo an douar da diwan.

Hag e ve pinijen ganti,
Da vo ho lezen hon hini,
Ha goude reuz ar vue-man,
Ni 'yel d'an Nê da diskwizan !

IMPRIMATUR :

Brioci, dite 14 maii 1899.

M. LE PROVOST, *v. g.*

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillaume